

**KIS-399 – Gl. rééducation, réapprentissage, réadaptation, réinsertion.**

(GE – 03 07 91)

Goude un darvoud pe ur c'hleñved o lezel war e lerc'h arlenadoù arc'hwelel (eleze koll pe direizh un pe lies arc'hwel) e vez lakaet ar gouziviad dindan brederioù arbennik evit ober dezhañ aspiaouañ arver an izili pe an organoù nammet. Termenoù disheñvel a reer ganto hervez an divoud desellet.

**I.** – Mar deseller an organ pe an ezel tizhet, e rener an **addiorren** (Gl. **rééducation**) anezho.

Sk. : “**Addiorren** an dorn, fiñverezh al livenn vrusk, ar c'herzhed” (Gl. “**Rééducation** de la main, de la colonne thoracique<sup>1</sup>, de la marche”).

**II.** – Pa stier an desell war un arc'hwel resis bet strafuilhet pe gollet, e reer kentoc'h gant Br. **addeskiñ** (Gl. **réapprentissage**).

Sk. : “**Addeskiñ** an distilh, al lenn” (Gl. **Réapprentissage** de l'élocution, de la lecture”). Keñveriañ : “**Addiorren** ar c'herzhed” (da skouer, goude torr un askorn en divesker hag un diloc'hekaat) hag “**Addeskiñ** ar c'herzhed” (goude seizi an divesker ha koll an arc'hwel).

An diskiblezh vezegel oc'h ober war-dro an addiorren a veze anvet gwechall Gl. **médecine physique**, Sz. **physical medicine**, despizet evel henn : “Diskiblezh vezegel oc'h arverañ dreist-holl kalvezderioù bevfiñvel ha gwezherioù fizikel evit prederiañ anaezioù diseurt, ha da gentañ direizhoù ar benvegad emzilec'hiañ.” An termen Br. kevatal a vije bet **mezekniezh fizikel**.

Hiziv e renker ar prederiadoù-se dindan an anv Gl. **rééducation fonctionnelle** (pe **motrice**), Sz. **functional reeducation**, despizet evel henn : “Teskad an hentennoù amkanet da wellaat pe da gempouezañ un namm loc'hadel pe arc'hwelel.” Br.

---

<sup>1</sup> Anvet *colonne dorsale* gant kalz aozerion c'hoazh daoust ma sav da 1950 an anvad nevez diferet er PNA, sl. GEGO (evezhiadenn gant Gab CHEREL).

**addiorren arc'hwelel.** Diouzh ret, e c'haller ober gant **adarc'hwelekaat** "ober d'un organ, d'un ezel bezañ arc'hwelele en-dro".

**II.** – Mar seller, n'eo ket mui ouzh ur parzh korf pe un arc'hwel, met ouzh ar gouziviad e-unan en e geñver gant oberoù e vuhez, gwezhiennoù e vicher, e komzer eus Gl. **réadaptation**, Sz. **rehabilitation**, despizet evel henn : “Teskad an diarbennoù a denn, en tu all d'an addiorren arc'hwelel, da adsavelañ ar barregezhioù korfel, bredel ha micherel.” Br. **azgouestaat**.

An diskiblezh vezegel he deus kemeret lec'h ar **vezekniezh fizikel** a anver e Gl. **rééducation fonctionnelle et réadaptation**, e Sz. **physical medicine and rehabilitation** hag e Br. **addiorren arc'hwelel hag azgouestaat**, despizet evel henn e Frañs : “Diskiblezh vezegel kaougantet gant un testeni studi arbennik, ensavet e 1965 evit kemer lec'h ar vezekniezh fizikel.”

Lakaet er-maez an testennoù kefridiel, e reer ivez eus an diskiblezh-se : Gl. **réadaptation**, **réadaptation fonctionnelle**, oc'h angeriañ **rééducation**, ha moarvat e c'hallfed ober e Br. ivez gant **azgouestaat**, **azgouestaat arc'hwelel**.

**III.** – Erfin, mar dalc'her stad ouzhpenn eus ar gedvuhez prevez ha foran, ar metou micherel ma tle ar gouziviad kavout e blas en-dro, ez arverer an termen Gl. **réinsertion (sociale)**, Sz. **social rehabilitation**, Br. **adkenemprañ** (– **gant ar gedvuhez**, – **gant ar metou kevredigezhel**, – **kevredigezhel**).

#### **GERVA BREZHONEG-GALLEK.**

*adsavelañ* restaurer.

*anaez g. -ioù* affection, maladie.

*angeriañ* sous-entendre (sl. KIS-359, p. )

*arc'hwelele* aa. fonctionnel (apte à fonctionner).

*arc'hwelel* aa. fonctionnel (concernant les fonctions).

*arlenad* g. séquelle.

*barregezhioù* ls. (b.) *korfel*, *bredel ha micherel* possibilités physiques, psychiques et professionnelles.

*benvegad* g. *emzilec'hiañ* appareil locomoteur.

*bevññvel* aa. kinésithérapique.

*desellout* considérer.

*diloc'hekaat* immobiliser.

*direizh* g. désordre, trouble, perturbation.

*direizh un arc'hwel* trouble fonctionnel.

*gouziviad* g. -*ed* (un) patient.  
*gwezher* g. -*ioù fizikel* agent physique.  
*gwezhiennoù* ls. (b.) *micher* tâches professionnelles.  
*kalvezder* g. (une) technique.  
*kaougantañ* sanctionner.  
*namm* g. *loc'hadel* handicap moteur.  
*nammet* aao. handicapé.  
*nammed* g. -*idi* (un) handicapé.  
*prederioù* ls. (g.) soins, traitements.  
*prederiadoù* ls. (g.) soins, traitements.  
*stiañ* centrer, focaliser.  
*testeni* g. *studi arbennik* certificat d'études spéciales.